

# AR BEREN DAOULET.



Gant Y. DANIEL (Tredaner)



1		8		17
Me em euz eur beren daoulet, Gant ann holl a he c'hoanteet.		Salud d'ach peren ru a mad, Me am euz gwal hoant do tanvad.		Gantan he vin everuz mad Roed e gont d'an advokad.
DISKAN		9		18
Ma dousik koant, Koant, koant, koant, Ma dousik koant Deuz a Wengamp.		Autro kommeret o c'hamzer Rag ar per taouled a zo ker.		Roed e zac'h d'ar miliner Evit m'a c'halla mont dar gaer.
2		10		19
Homan a zo eur beren goant, Kaved n'eur jardin en Gwengamp.		Distu en euz bet goulennet Peguement ar beren daoulet.		Mont a ra an advokad er porz Ha ne ra ne med krial forz.
3		11		20
Evit dei d'a vezan taoulet Biskoaz den n'a neuz e blonset.		Na c'houl nag aour, nag arc'hant, Met eur pod yaouank deuz e c'hoant.		Hag ar miliner war e lerc'h A war e gein eur zac'hat kerch.
4		12		21
Deuz a Bariz deuz an Naoned He teu tud yaouank d'he gweled.		Neuze a c'houlen diganti A c'hoant a deuz da dimezi.		Na dei ken an advokadet Da Wengamp da glask per taouled.
5		13		22
Donned e ra milinerien Da hessa lerez ma feren.		Hi a respont en eur farsal, Roet d'in amzer da sonjal.		Ar miliner gant e dour red A c'halla chomp da vala ed.
6		14		23
Goude e teu eun advokad, Eur pod hag a zo teodet mad.		Pa gomsfet d'in a zimezy, Komzet deuz eur labourer d'in.		Barzed Breiz-Izel me o ped Da zoned breman d'am eured.
7		15		24
Dallek e he deuet en ty Hag e quenkent d'he zaludi.		Dimeuz eur labourer douar A neuz loened da gaz dar foar.		A goude a c'halli moned Gant ma labourer da gousket.
		16		25
		Jist mad en e dy da eva Amann hag uo da werza.		Ken a vo dit ma bro Gwengamp Na weli ken da beren goant.